

150

DA HERY PEMP

3^{me} ÉDITION

*Evid ma reno prim Hery pemp gwir Roues
Pedomp holl ar Gwerc'hez hag he Mabik Doue,*

1

Deoc'h goude Doue e dleom holl senti.
Bed oc'h gant leron Drouk lakeet e-mez ho ty,
Aboue hon bro ges deuz kollet ar iec'het,
Gant meveillen an diaoul bed eo bulumet,
Deut rak-tal, Roue mad, astennet d'imp ho dorn.
Ha Digaset ann anv goude ar gouan skorn.

2

Ebarz kreiz ar poull fank pel a zo omp koueet.
Tolet omp bed enn-han gant eur bern jalodet.
Ho zad ann drouk-speret a zo tad ann holl gaou.
Gwerza ra aliez billy tan evit kraou,
Ha togo touseged evid gwastel gwiniz.
Laerez ha ra ann holl everien hag hostis.

3

Pa lakaas Eva he dorn war an aval,
Ha c'houie gwir ha krak a re eun dra gwel fall.
Ar pec'het roas d'ezhi eun tol spontus ha strons.
Ann aval a goueas kerkent enn eur blonsan.
Ni, zo bugale diwar ann tam yac'han,
Ar republicanet a zo diwar ar blons.

4

Bez a zo pel amzer ziuoaz evit omp holl.
Emaint evel moc'h goue ho porc'helli ar vro,
Kassomp anhe rak-tal fonnuz diwar hon zro,
Rak gant-he a viskoaz ne meump bed nemed koll.
Tud hag ho deus ann tu vit boeta ann higenn,
Tamo krak aoutronez ho deus c'houez ar hignen.

5

D'an dud diwar ar mez e reont da gridi,
Eur bern komzou zod naill, ar brasa marvailou,
Evel ar groagez koz lar d'ho bugaligou
Evit ho zerc'hel kleink enn noz ebarz ann ty.
Ma roet ho mouezou d'eun Nop pe d'eur Beleck,
Ho po noz-de d'ho c'heul eur loen du naounek.

6

E teufet kam ha tort o posleic'h ha kromet.
Koll a refet ho nerz, koll a refet ho ialc'h,
Deuz ho torn e kouezo hag ar bal hag ar fale'h.

N'ho po tam peuc'h ebed, nag er park nag enn ty,
War ho tal vo laket oc'h eun den milliget,
Ha gwir e tiano plu vrann war bek ho fry.

7

Ma c'hallfe ann diaoul terri he stagadur,
Rena war an dud kez ha kemer krog er stur,
Evel a deuz c'hoant braz ar republicanet,
A-ben eun tam amzer; amzer eur c'hornedet,
Ar bed holl a vije malet ha luduet !!
Pa c'hefet da voti, mignonned bet gwall fur.

8

Gir eunn den ho pet sonj, zo kroc'henn he ine,
M'ha c'het d'he lousad enn hostilliriu,
Mar gwerset anez-hi evit gwenegadou,
A rofet ho mouez d'eur marmouz fall bennag,
Hag he oberiou drouk war ho kein a vo stag.
Voted evit tud vad, tud a doujans Doue.

9

Merc'h hena ann Illis, ar Franç hon bro hon mam,
A zo gwel izelet, bed e deuz eur gwel lamm.
Kerzed a re soun, yac'h, gant ar roue gwechall,
Hirie'man a dribill war lerc'h ar broio all.
Ar votadek kenta c'hall disaman ar vro,
Evel c'hall rei d'ezhi ive strons ar maro.

Devez ar vtoadek eo ar iar here,
Ann hini a had drok a ve bihan he bleut,
Enn he di ar billik e deuz c'houez ann treut,
Mar kaset kanfardet vit ober lezenno,
Diveed vo da glem ha klask eunn digare,
C'hoariet vo ann taol, ha iennet vo Guillo!!!

Gant ann drouk sperejou pel a zo omp kaset.
Arry omp er poull du zo barz pors an ifern,
Skoulma ra ann dour brein war hon diskoaz lousset
Diaoulou he eun c'hourzin zo deut e mez a vern ;
Hastomp ober distro, souzomp rak-tal souzomp,
Poent bras eo pidi, ia ma zud vad, pedomp,
Da c'houlen vit hon bro gand madelez Doue,
D'hon bro (1) emzivadez, eunn tam sell a drue.

ADRIEN RAISON DU CLEUZIQU.

Août 1877.

(1) Minorez.